


## ILIS MIRACULUS AN ITRON VARIA REMENGOL

Savet gant ar Roue Gralon

GOUDE MA OA BEUZET KÆR IS

'Neb a bod Guerc'hes Remengol,  
Biviquen ne dai da goll...



En Escopti Ker-  
ne, el lec'h ma  
brema môr Dguar-  
nenez, e oa gnechal  
eur guer vrasneur-  
bet, hanvet Is.

Eur voguer ledant  
hak huell, gant sclu-  
jou houaru he di-  
fenne deus ar môr.  
Er gær-ze ne velet,  
e touez an dud  
pinvidic, nemet di-  
zurs, goal, exempl  
ha fallagriez. Gra-  
lon, pehini a chome  
neuze en Is, a voa  
roue Breiz-Izel. Bet  
e oa brezeller en e  
yaouanquiz, ha rust  
en andret e zujidi;  
mæs en e gozoi,  
sclerigen bet dre ar  
feiz kristen, eteuas

drouzet ar roue Gralon, abalamour d'an droug-oberon, d'an torfejou ha d'an injusticou a ret bemdez, e pales e vœc'h yaouanq : mæs goab a ret anezo, hac ar Roue, simpleet dre an oad, a'en doa mui a c'halloud avoalc'h evit arretit dizurzo kær bras.

Doae a skuisas, en fin, o velet Is caledet en he fec'hejou, hac a roas da anaout da Æl Breiz-Izel, e vignon Guenole, penos eb dale pell, ar gær gær-ze a vije beuzet gant ar môr. Kerkent, Guenole a bignas var e vœc'h, hak a redas da guær Is, e sonjal c'hoas dizarmi koler Doue, Mæs tremenet e voa an amzer a druez. Pa en em gavas an abad santel, var dro' anter-noe, seljou Is a voa digor, hak ar môr a c'broze spontus o ti-ruilla var a' dud, an tier hak ar palechou. Guenole ne allas savetei nemet Gralon ep keq : guelet a rer c'hoas roudou treid e vœc'h er garrek, var behini, abaoe, abadet Land-vennec, arog komer ho c'harg, a deu da ober o feden ha da anaout ar roue Gralon evit fondatour ho c'houent.

Kær is ne ma mui, evel Saldm, Gómor ha Babylón; hak hirio ar môr a ruill dreist he fen.



AN ITRON VARIA REMENGOL

da veza doue, evel  
eun oan. Hirvoudi  
a re abes var di-  
zurzo Is, ha var  
ar vœz droillet a  
rene e vœc'h, ar  
brincès Ahès, gant  
an noblang yaouanq  
a gær ha deus ar  
vro hanvet, hirie,  
Kær-Ahès pehini a  
oa dezi a leve.

En auzer-ze, e  
oa en Breiz-Izel,  
daou abostol zan-  
tel, daou vignon da  
Zoue, sant Kaou-  
rintin, kenta escop  
a Gue'z per, ha sant  
Guenole (1), kenta  
abad a Land-ven-  
nec; abes o deoa  
prez-guet ar feiz er  
gær a Is, ha gour-

(1) *Guen-oll-e. Oll-e-Guen* (il est tout blanc), hanvet evel-se gant he vam, ar santes Ven, abalamour ma oa eur buguel koant ha fur. Sant Guenole, dre e vertuzion en deus meritet an hano. kaer a Æl Breiz-Izel (l'Angé de la Bretagne).

# KANTIK SPIRITUEL

EN ENOR

## D'AN ITRON-VARIA REMENGOL (1)

### PATRONEZ BREIZ-IZEL.

*Kurunet dre urz hac en hano hon Tad zantel ar PAB PILNAO, an 30 a vis mae 1858, gand an aotrou RENAN-NICOLAS SERGENT, Eskop Kemper ha Leon, dirak eun mver bras a veleien hak ospen kant mil den, deuet en devez-ze, a bep bro, da Remengol (2)*

Itron Varia Remed-oll,  
Miret onzimp ne chañp de goll.

Guere'hès sacr' a Remengol, patrones Breiz-Izel,  
Pedet evidomp, hirio ha pa rankimp mervel!

Var an ton : *Glac'har ar Verc'hes.*

Tad, Mab, ha Sperec-Santel, tri ferson an Drindet,  
Me ho ped, a vir galin, da rei din ar sperec  
Da composer e'h antik dar stereden vrillant,  
Ar foundelizen gaëra deimeus ar firmamant.

Ho Merc'h eo, Tad Eternel, ar Verc'hes-binniguet,  
Priet ar Sperec-Santel, Rouanez ar Ælet,  
Dreist an oll groagnuez devot hi zo bet cavedin  
Da veza man da Jesus, hon Redemptor divin.

Pa zeuan da niveri, Guere'hès sacr' a santel,  
An enor, ar meulodi hoc'h eus e Breiz-Izel,

(1) Remengol, hanvet guere'hès *Ru-men-goulou*, da lavaret e *Menn-Ru-ar-goulou*, abalamour ma vez eun eur pen ru, pe eun templ consacret da c'houeñ de, enebet evel eun doue dindan an haon a Teutates (Houe-Tud), ar roue Gralon, goude heza diskaret ar temp'ze ha zavel eun e biag eun iliz kaer da Vam ar guir Doue, a chancha-hano payen *Ru-men-goulou* en hano christea a *Remengol*, da lavaret e *Remed-oll* deus a bobini ar B-trones a zo hanvet an *Itron Varia Remed-oll*, *Notre-Dame de Tout-Remède* abalamour dar hanvelou brez a ra beudez, eoa, ar Verc'hes, aboue auzer ar roue Gralon betec hirio.

Remengol a zo bet, a visioas ar gaëra ag ar sant la iliz a Vreiz-Izel; herves an dud koz, pob gaur Vreton a gle, eur vach da viana, beo pe evaro, ober pelerin eb Remengol.

(2) Kurunen an Itron-Varia Remengol, ar gaëra zo bet guelit hiskoaz e Breiz-Izel, a zo en aour hac e peñtes.

Da zao-heol, Gralon o veza pignet gant Guenole var lein Mene-Hôm, a dolas achane eur zel truezuz var he lerc'h, muez el lein ma edo ar gaer gaer a ls ne velas mui nemet mdr Douarnenez, hak e kouezs d'an daoulin evel trugarec Doue hak ar Verc'hes da veza saveteet e vuez.

Pa zavas divar e zaoulin, e velas dindan an heol o lugueni *Ru-men-goulou*, he *Menn-Ru-ar-goulou*, var pehini e vije sacrific tud, heo, ha heb miz eul biaguet bian e hoas eus ar vrôn. Neuze, heuz t en e zaoulin hak e zaoulinag savet euz-ek an En, e lavaras d'he vignon-santel :

« Var ar Men ru zant, consacret da eun doue barbar, me a raf sevel e eun iliz gaër d'ar Verc'hes; hak el lein ma skuitter ar goad da Teutates e skuido Mam ar guir Doue he graon var Breiz-Izel.

Gralon a zalc'has mad d'he broñessa, ha beleien ar Bayonet, o veza em revoltet, pa veñont dispen temp' an doue faos Teutates, ar Roue christen ho ze has e kevser Argol, e pen ar Vretonnet convertisset.

Goude heza gret e he den var Mene-Hôm, ar Roue Gralon a heññas Guenole da avaty Landevenec, savet gantan eun neubent blavezou kento he Diarac kement-se en devoa c'hoas roet he balès, e Kemper, da eant kaotrintiz pehini e deoa torret e maon desan ha d'he compagnons gant eun tam deus he besk vian. E plac' ar palès-ze, emma brema iliz caër cathedral Kemper.

Gralon a dremanas e Landevenec ar rest deus he vuez, en eur binnigen gallet, hak alies a ze gant e vignon ker da Remengol, da bedi evel he bobl an *Itron Varia Remed-oll*. Beza en devoa an eur d'he gallet beude bras e pever c'horn Breiz-Izel, hak o vevet etre diver'h Sant Guenole, e Landevenec, e recomande he eoa da Zone en eur lavaret gant fizioas :

- « Itron Varia Remengol,
- » Miret onzimp na zio da goll,
- » Pedit ive ho mah Jezuz,
- » Ma vezin gantan evurus »

Chouezee eant vras a zo aboue ma e mero Gralon, hak ar Vretonnet pere-ze hepret mdr feiz hak a galon, ho deus e hoas sonj eus ho Roue koz, hak eus e vignon sant Guenole. Mæs ma c'hanvefent guet oc'h istor ho bro hiee, pa zeont da zil an Drindet, da ha doue bras Remengol, a pa velont mdr Douarnenez, Mene-Hôm, Landevenec ha toue hiee iliz miraculus an *Itron Varia Remed-oll*, e lavarent, an daoulin eun ho daou-agat, en eur vale gant respel var doue ar Sant hak ar Roue :

- « Bras ar burzudou a zo bet,
- » Ebars en amzer dremanet ! »

Bras ive ar burzudou a ra c'hoas hirio an Itron-Varia Remengol en andret an oll Vretonet, hak spicial en andret ar beleienet a den beude d'he guelit, alies eus a bell bro, eus anezo diate h'n hak e cor'ho rochedou.

Ar vinoret direzet, an jufanvezet paour, ar heorien noas, soudardet, Breiz-Izel e creis tan ar brezad, ar bartoladet var ar mdr brase furol an oll dud affijet a goll, a galon hak a sperec, darn en ho fannou, darn en dangeroù, darn all en dispev, hak oll var goule ar mato, ho deus sonj eus ho Mam doue ha mañ, hak alies e leveront dezii gant carante ha gan-fizioas en he gailoud hak en e madelez.

- « Guere'hez sacr' a Remengol, patrones Breiz-Izel,
- » Pedit evidomp, hirio, ha pa rankimp mervel ;
- » Pedit evel Breiz-Izel, evel ar Vretonet,
- » Ho deus ho karet, ho kar hag ho karo bepret »

Va speret a zo dister evit ho discleria,  
Nemed oc'h-hu a zeufe, hirio, d'am azista.

Mæs ennoc'h leun a fianç em enz antreprenet  
Publia ho calloud vras etouez ar Vretonet.  
Ha discleria ar graçou accordet d'ar bed oll,  
Dre c'hraç Jesus hon-Autrou, en ilis Redemptor.

E publec'h m'eo enoret, Mari, hor mam santel,  
Alies ve silaouet n'ep zo dezi fidel;  
Mes beza e deus eur plaç bars en pini, bemdes,  
E scuill var ar Vretonet tensor ho madeles.

Er plaç-ze, e Breiz-Izel, meurbet daremprenet,  
Eu escopit a Guerne, er barez a Hanvec,  
Eus eun ilis consacret da c'hloar ha da enor  
Rouanez an oll Alet, guir vam hon Remengol

Guir dud devot d'ar Verc'hes, m'ho ped, diredit oll,  
Deut gant laouenediguez da ilis Remengol,  
Evit pedi mam Doue da rei deoc'h ar yec'het,  
Ha da sivoal hoc'h ene dious laç ann drouc-spered.

M'ar d'è poanietoc'h ene gand gouliou ar pec'het  
Deut d'ar sourcen a vuez, hac o pezo remed;  
Gouennet oc'h mam Jesus graçou célestial,  
Ma c'hellot chench a vuez, beza dezi fidel.

Ma dé ho corf forbuet gant an infirmite,  
Deut da ilis Remengol gant eur guir garante,  
Ur plaç leun a viraclou dre c'hraç ar Verc'hes sacr,  
Pini en oc'h oll boanion ho soulajou timat.

A bévar c'horn Breiz-Izel e teu pelerinet  
Da bidi Mam hor Zalver gant eur galon barfet;  
Eus an eskopti Leon, Treguer, Guened, Kerne,  
E teu an oll dud devot da veuli Mam Doue.

Dre 'r brut eus ar miraclou a ra e Remengol,  
Dre graç Jesus hon Aotrou, e deus ur galloud oll,  
Mar teu ar belerinet bemdes epad ar bloas,  
D'ober an dro d'he ilis var ben ho daoulin noas.

Un nombr bras a viraclou a ra ar Verc'hes sacr,  
Ebars ilis Remengol dre c'hraç Jesus he Map;  
Dre he sicour galloudus em eus antreprenet  
Discleria lot anezo etouez ar Vretonet.

Ar Verc'hez a Remengol, er barez a Hanvec,  
E deus grêt a nevez ur miracl kaër meurbet,  
An oll a so estonet oc'h he consideri:  
N'en deus netra impossubl dec'h, Guerc'hes Vari.

A dost dezi eur buguel c'hoas en ean out dister,  
Pa voa ar velin o vala, a gu-zas er rivier;  
Gant an dour e voa ruillet, ar c'has e tout ar bal,  
Ma songer e voa fla-tret, allas! gant an dour mal.

E dud gant eals, nec hamant ha meleaniet oll,  
Er goestlas, a voues huel, d'ar Verc'hes Remengol;  
Mari leun a garantez, dre e darn biniguet,  
A ziouellas e vuc, er meas e voe tonnet.

Evit rei guir desteni deus ar miracl kaër-ze,  
Ar buguel da Remengol a voa kisset neuze,  
Laket er procession, gantan, ar c'houlouan,  
Evit publia galloud ar Verc'hes souveren.

A dost d'ar C'hastel-Nevez, herve ma eo prouvet,  
He deus grêt guir Vam Doue eur miracl kaër meurbet.  
Dre an tan eun tiegu z a c'h' d'ar berissa,  
P'o deuz pedet ar Verc'hez da zont d'ho azista.

An ozac'h, guir serviger d'ar Verc'hez biniguet,  
En em strinquas d'ann daoulin de fid gant respect:  
Mari, leun a garantez, a zigac'h glo bra,  
Hak, hep ober droug da zen, an tan goal a vougas.

Chom a ran c'hoaz sebezet, Guerc'hes, mam a druc,  
O compren ho kanteze evit o pugale;  
En disquezet oc'heus bet d'eur c'hrouadur daou vloa,  
Oc'h ober en e andret eur miracl ar kaëra.

Dre un tourmant ar brassa eur c'hoz ty o coueza,  
Ur c'hrouadur o tremen en eun gay didaana;  
Ar vein vras en dro deun, ma songer voa lazet,  
C'hui heppuen h en zicouras, Rouanez an Alet.

E dud a lavare dec'h, Guerc'hes a Remed-oll:  
Sicouret hor c'hrouadur, pe e c'hato da goll!  
Ar vein vras zo remuet, ha dre graç ar Verc'hes,  
Ar bugelic a c'hoarze diudan, leun a vuez.

Mari, hor mam souveren, var v'or ha var zouar,  
A den e servicherien dious anquen a glac'har,

Nombr bras a vartolodet e deus bet preseruet,  
Prestic da goll o buez, p'ho deus hi he fedet.

Nombr bras a valimanchou e deveus preseruet,  
Hac an dud hac ar madou, dre he graç biniguet ;  
Ha bagou ha goberit e creis an tourmiant bras,  
Pa bedent hor Mam Mari, a obtene ho graç.

C'hoas eur c'hrouadur yaouanq a escopit Leon,  
A voa kouezet er rivier, Doue, pebez eston !  
Klasquet gant cals a glac'har, a pa ho deus pedet  
Ar Verc'hez a Remengol, en instant eo kavel.

Pa gachont ho c'hrouadur, hag en prest da vervel,  
Ec'h implorjont, a nevez Mari hon Mam santel,  
Da rei dezant ar vuez dre he graç binniguet,  
Dirac ar gompagnunez, ho feden zo klevel.

Eun den a c'houlet Léon a gollas ar c'herzet,  
Zo bet eiz mis o vale voar bouez diou vas-loaec  
Grét pris gant ar medecin evit troc'ha he c'har,  
He zroc'ha e rez e c'hlin, boue, pebeus glac'har !

Eun nosvez e ne vele e teuas sonj deza  
E voa bet e Remengol gneichal o pardonna,  
Hac e sant en e galon eur garantez ardant  
Rac eur guir devotion d'ar Verc'hes oll buissant.

Guir vam Jesus, hon Aotro, eme affiget,  
Va zikouret em poanion, Rouanez an Alet,  
A me roi e donezon kaëra tra zo hem zi  
Da gass da zeiz ho pardon evit oc'h enori.

Mari, leun a garantez, a bedas e Mab ker  
Da exauci ar beden a re he servicher :  
Réceo a ras ar c'herzet dre graç guir *Remed-oll*,  
A bed eo oc'h he meuli en ilis Remengol.

Tregont den en eur vagic a bares Plougastel,  
A gonfontas e rad Brest, gant eur barrat avel ;  
Oll e pejond a galon patrones Remengol,  
Eur batimant e deuas, savelet int bet oll.

Er gær gaër a Vontroulez e krogas an tan goal,  
Ar flammou tan, tro var dro o velet o nijal,  
Eur barner yaouanq ractal, d'ar Verc'hes a bromet  
Mont da ilis Remengol, hak an tan zo mouguet.

Evit gounit ar victôr, soudardet Breiz-Izel  
A bed Mari gant fiziañç, e kreiz tan ar brezel ;  
Hak ar victôr gounezet, ezeont a vandennou  
Da Remengol diarc'hen, e korf ho rochedou.

Martolodet an Arvor, ruillet a diruillet,  
Var ar môr bras e furol, prest da veza kollet,  
Eb eôr, eb stur, eb sicour, oll e renkont mervel  
Pa deu d'ho savetei patronez Breiz-Izel !

Ne ouffe quet niverri na dont da henvel oll  
Ar miracloù infini a ra guir *Remed-oll* ;  
Evit nep zo guir gristen a leun a galon vad,  
Hi zo guir advocades dirac Jesus he mab.

Ken a gorf, ken a ene, kement zo affiget,  
Deut da ilis Remengol gant eur galon parfet,  
Pedit eno, gant fianç hor mam santel Mari  
Ha renoncet d'ar pec'het evit plichout dezhi.

Sant Thomas ha sant Bernard, tud guiziec ha santel,  
A da Vari, mam Jesus, daou servicher fidel,  
Hon assur a bers Doue, biken ne zai da gol  
An nep a gar ar Verc'hes, patronez Remengol !

Demp eta da enori brema, da Remengol,  
Relegou sacr' ar Verc'hez, an daouzec abostol  
Ha relegou sant Joseph ha guir groas hor Salver,  
Maro, vit al liberté, var iein mene Calvar ;

Relegou sant Guenole, mignon bras da Zoue,  
Relegou sant Caourantin, kenta eskop kerne,  
Ha calç a relegou all gant ar Pab digasset  
E presant da Remengol evit ar Vretonet.

Kouiraich, kourraich, Bretonet, ha gant fiziañz deut oll  
Da velet ho Patronez en ilis Remengol,  
En em roet, a vrema, da zervicha Doue,  
Ha da pidi ar Verc'hes ar rest eus ho puë.

Kement ez eo enoret ha karet gant Doue,  
Ma permet ganti ober herves he bolante :  
An niver bras a c'hraçou a skuill demp var ar bet,  
A dremen oll dre zouarn ar Verc'hez biniguet.

Ar bemzec euz a vis Eost, an devez ma pignas  
En Envou gant an Alet en solennite vras,

E teu an oll dud devot gant guir devosion  
D a ilis kaer Remengol da c'honit ar pardon.

Eun Doue oll galloulec a bermet dre e c'hraç  
Ma ze da zul an Drindet emañ ar pardon bras,  
Ar bobl eus a Vreiz-Izel a veler, en deiz-se,  
O touet da Remengol da veuli mam Doue.

En deiz-se e c'honezer induljançon plenier  
Ebars ilis Remengol e ty-man hor Salver,  
En eur ober gant glac'har en guir gontesson,  
Hac o receo hon Salver dre ar goumunion.

Da eizvet a vengolo gouel he Nayite,  
Ez eus ar memes pardon en ilis sautel-ze,  
A da peb gouel ar Vreiz-Bez a zo epad ar bloa  
E teu an oll dud devot d'he bisita gant joa.

Er solemnite saptel eus a Sul an Drindet,  
Kement a va d'ar pardon a zo oll ravisset  
E c'onsideri Jesus ebars er Sa'ramant  
O c'hortos hor c'halonnou gant karantez ardant.

Dout oll etar, christianien, dont oll a vandennou  
Da Remengol da bedi Mam Jesus, hon Au'rou,  
Assuret oc'h da veza gant Doue pardont et,  
Mar bec'h guir servicherien d'ar Verc'hez biniguet.

Renoncez d'ho pec'hejou hac en em arollet,  
Ebars er breuriezou a zo instituet  
Da enor ar Verc'hez eyel ar Rosera,  
A rent d'hor Mam souveren un enor ar d'haera.

Ne yanquet quiet da laret bemdez eur chapelet,  
Lot demeus ha c'harmaen, eur dizenez hanvet;  
Nep a zeui d'he rec'la gant karantez barfet  
A vezo guir zervijer d'ar Verc'hez biniguet.

Tad leal a Vreiz-Izel, oll vignonet va bro,  
C'hui, evit pere fallis ar vre zo e'honorou,  
Joa deoc'h var an douar, ha gant digant Doue  
Da vont c'hoas da Remengol, ar sourcen a vue.

Pedit en ho c'hlenvejou, pedit en ho c'hlae'har,  
Ha pedit en oll beanton hon deus var an douar  
Brassan santes zo er bed, *Guerc'hes sacr Remengol*;  
M'ar bezit fidel dezi, ne deot biken da goll.

Guerc'hes glorius Vari, pedet, me o supli,  
Evit an oll dud devot a visitai ho ty;  
Chassel an dronc spererjou demeus hor c'halonou,  
Ha presentet da Zoue bemdez hor pedennou.

Guero'hes sacr a Remengol, patronnez Breiz-Izel!  
Pedit evidomp, hirio, a pa renkimp mervel,  
Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonet!  
Ho deus ho karet, ho kar, hac ho karo bepret!

Itron Varia Remengol, mam santel da Zoue,  
Pa vimp en heur hor maro, recevet hon ene,  
Ha dre o torn biniguet kassit-hi da repos,  
Ha da veuli an Drindet e gloar ar Barados.

---

## PEDEN AR ROUE GRALON

D'an Itron Varia Remengol.

Itron Varia Remengol,  
Mirit ouz mp na zaimp da gol;  
Pedit ive ho mah Jesus,  
Ma vezimp gantan evurus.

Itron Varia Remengol,  
C'hui eo Rouanes ar bed-oll,  
Bezit hor Mam, hor Batrones,  
A ni ho meulo da james.

---

## PEDEN

D'an Itron Varia Remengol,

Evit beza preservez eus ar c'hlevejou, hac ispicial  
eus ar c'holera-morbus.

---

*(Ar beden-ma, lavaret a galon, e deus preservez eun niver bras adud  
ha savetret kals a re all skoet gant ar c'holera, en ker Montroulez,  
er bloavez 1834.)*

---

Itron Varia Remengol, patronnez Breiz-Izel, mam an oll dud affliget a  
speret, a gorf hac a galon, c'hui a zouten kourach ar souldardet, e creis.

tân ar brezel, c'hui a asten ho torn a deus d'ar varto'odet prest da gonfonti er mór bras e furol, c'hui a ziken allies, e c'haus gueta ar c'hlanvour paour ho c'har evit rei deus ar ye'chet, hag hanvet oc'h en guibonne *Remed ar bed oll*: Pellait eta dionzin, Guere'hez sac'r, ar voc n gant an oll c'henvejon danjerus, va dioullit ouz ar mero subit, hac evit renta testiñ d'ho oialetés, ezin da Remengol d'ho m-ull, ha d'ho trugarekaat en oc'h iliz santel. Eno n'ho c'haus biscoas refuset n'riñ deus ho pagale; bezit trugarezus em andret. Goueoud, ra vezo grêt batoote Doue, ha pa zono va heur diveza, Itron Varia Remengol, ho pet truez ouzin, grit din mervel en ho carante, evel ar sant galouduz, pere a beder en ho ty santel.

Evel ze bezet grêt.

Itron Varia Remengol,  
 C'hu zo a remed ar bed oll,  
 Pellait dionzin an teir goalen,  
 Brezel, kenès hac ar voc'ent...

Ilis Remengol a zo bet, abaoñ amzer ar roue Gealou, hanvet ilis *Remed oll, ann Ilis miraculus*, abalamour d'ar miraclou bras a ra eno ar Ver'hes Vari.

Dre he galloud ar c'hlanvour paour a bare,  
 Ar mud a goms hac an den cam a vale!

Hanvet eo ive *source n a vue, ar fontein a c'hraçou*, abalamour d'ar graçou a ro Doue en ilis d'an oll gristenien.

Nac a bec'h-er-eus Doue disp'artiet,  
 E Remengol a zo bet difaza'!!!

Ilis sac'r an Itron Varia Remengol, a c'hoas, hanvet *Fis ar Vretonet, Ilis ar Sant hac ar Rouanel*, abalamour, goule ma oa confoutet kær Is, ar roue Gealou a reas se'et ilis Remengol en eno d'ar Ver'hes, evit trugarekaat Doue da veza za'etec dezau he vue; mont a re alies d'he bizita, e compaignaès sant Kaourin, kentan eskop Kemper, sant Guenole, sant Guen-Æl, ha cals a zant all, pere a veve neuze e kout Landevenec, hac a brezague ar faz dre a vro.

Abaoñ an amzer-ze, ilis Remengol a zo bet daremoredet gant ar bobl a Vreiz-Izel, karzet a c'hraçou hac a intol'uson ar re vrassan roet gant bon Tad santel ar Pab hec an eskabin.

Er bloas n'ileis cant pemp hac auter cant, on Tad santel ar Pab Pii Nan en deus roet da ilis Remengol eun tam eus vi' groas hon Salver Jesus-Christ, hac eun tam eus he garmen sp'rit; ar momeus Pab en eus c'hoas likat eus a Rom da Remengol eun tam eus a voal ar Ver'hez hag eus ar b z en pehini a voa bet sebetet, darn eus a relegou sant Joseph, sant Joachim, sant Ian Badezon, sant Zachari, santez Anna, santez Elisabeth, ann dionz-e Abostol, ar p' var Avener, an doctoret bras eus an Ilis, ha dre eur garante ar vrasa evit Remengol en deus c'hoas roet d'an tem d' sant d-ze corf zant Selen, n'guon ha compaignon an abost d' sant Paul, ha relegou *trichant pemp ha tri ugent sant, evit peb devez ar bloaz*.

Archescop Paris en deus roet ive da ilis Remengol-darn eus a relegou sant Louis, rote Franç. santez Genovefa, patronès Paris, ha cals a re all.

Ar c'hardinalet, arc'heskop Tour, arc'heskop Bourdel, arc'heskop yon, arc'h-skop Rouan, eskop Strasbourg, eskop Chart'r, eskop Roason, eskop Sant-Briec, eskop a' Nannet, arant on Joseph-Mari Guveran, eskop Kerne a Leon, maro en Kemper, evel eur sant, iskibien a' a Vreiz-Izel, a Franç hac eus ar vezion all, ho deus roet da ilis Remengol, evel presachou ar c'hraç, relegou eun miver bras a sant, pere, da bep pardon, a ve d'aget e proe son gant ar belerinet.

Kement Sant a ouff' ann den da bed en he boation, var an douar, a zo darn euz a relegou, en ilis miraculus-ze, kent kær gant ar roue Gealou; goulet a rer eno ouспен relegou ar Ver'hes, santes Anna, s. Joseph, an Ebestel, etc., relegou s. Augustin, s. Ambroas, s. Jêrôm, s. Ian Chrisostom, s. Bernard, s. Laurans, s. Sebastien, s. Roc, s. Bounic, s. Kaourin, s. Pål a Leon, s. Guenole, s. Enzen, etc. relegou santes Batha, santes Mac'hari, santes Katel, santes Mari-Madeu, santes Philomen, hag eun miver bras a re all, *ouspen trich cant*, pere a zo eno evel eur liopla sant dirac an Itron Varia Remengol oc'h he fedi da skilda he graçou var ar belerinet a deus deus ar bevar avel da veul, en ilis sac'r Remengol, Rouanes ar Sant, an Ælès, Advocades an arant, Patronès an dud paour, Esperans an ol gristenien, ha Mam ar Vretonet.

Ha brema, ma breudeur, demp oll,  
 Demp da bardon bras Remengol,  
 Demp da ilis ar Vretonet,  
 Demp da source n a vue Remed...

D'ar pardon bras, pehini a bad peub devez, an henchou a ve golet a belerinet, darn bet euz gant clevejon danjeus, darn all distro diwar ar mór pe eus ar brezel, pere a c'ha diare'hen, hac e corf hz rochedou goadec; ol en eur strouket d'ann daoulin ractal ma v'font tou ar ilis santel; alies en em gac'ive en he zones, eur c'haoc'k y'cauc' b'naac, deut evit e guenta goue'h, hac en eur vouela gant boumedguez ha javar:

- Salut, deuar baradus var b'ni peb kamad,
- A L'K, da'ou a joa ha zont em daoutagat,
- Salut, ilis Remengol, ar gaea zo er bed,
- Salut, va fatous vad, Mam ger ar Vretonet!!!

En he gever ive eur barz, eur pelerin roz, bet alies e pardonjou Remengol, ha deut c'hoas eur vach, var hontz-he vaz, da c'houer eur maro mad, a zistro bouen d'a gær en em gouarnubidi he batonez, chlaouet eo bet he beden, hac an Itron Varia Remengol en deus assuret sifidiguez d'he ne c'baradus Doue, ha r'pos d'he eskern beleg deis ar varn, e deuer binguet bered he bares. — Goueoud, pellait a ra gant anken.

Harp a ra alies var he vaz, ha teuel a ra c'hoas eur zel a drugare var z'uliz he Varn garanteuz, pa ne vel n'ni' ni met bec an' tour, e koue dau daoulin, hac e-lavar da'ou en he zaoutagat:

- Kenavo la Remengol, Kenavo da viken,
- Kenavo, Guere'hes Vari, c'hu, pini a garen,
- Kenavo, pelerin, Kenavo, lud va bro,
- Kenavo er Baradus, kenavo, kenavo!!!...

## INDULJANCOU REMENGOL

Dre eur skrit apostolik roet e Rôm, en ilis Sant-Pêr, d'ar bemzec a vis even 1835, hon Tad santel ar Pab, Pii nao en deus accordet en e vadelès eun induljanç pletier a remission eus ho holl fec'hejou d'ar gristenien pere, goude beza coveset ha communiel, a visito, gant devotion ilis sacr an Itron-Varia Remengol; un induljanç a seiz vloaz ha ken allès a zaou ugent devez d'ann oll belerinet, ken allès goueath ma visitant gant devotion ilis Remengol, ha ma pedin, eno, Doue hac ann Itron-Varia Remed-oll.

An Induljançon-ma à all beza gounezet evit an ansouñ.

Dre eur scrit all roet, ive e Rôm, ilis Sant-Pêr, d'an dec a vis guener 1836, (scrit pini a zo brema exposit en ilis Remengol voar un dolen aour, e c'hars treid ar Werc'hes), hon Tad santel ar Pab en deus e'hoas roet da ilis an Itron-Varia Remengol ann oll graçou, induljançou ha privilaichou accordet gant ar Pab d'an Itron-Varia-Loretta, en Itali. En ilis-ze e conservet an ty e pini a chome ar Werc'hez Vari e Nazareth hac e pini eo bet konsevet hac en deus bevet hor Zalver J.-C.

Er blavès 1205, an Ales a zougis a dreus an oabl, an ty santel eus a Nazareth d'an andret hiro Loretta, tost da Rôm, savet a so bet eno eun ilis kaër, pini a zo bet abroue darempredet bras ha karguet a c'hraçou gant ar Pab.

Neus er bed universel nemet an ilis-ze, ilis Loretta, hag ilis an Itron-Varia Remengol, da bere a ve bet roet graçou ker bras, ker caër. Ar gristenien a visito bremañ hag en amzer da zont ilis Remengol, ker brudet dre e miracloù, a c'houezo ar memes induljançon-hac ar memes graçou evel ar re a ia da Jerusalem, da Rôm pe da ilis Loretta, da visita bez hor Zalver J.-C., beion an Ebstel ha ty ar Werc'hez Vari.

Dre eur scrit all roet en Rôm, en ilis Sant-Pêr, hon Tad santel santel en deus karguet Eskop Kemper da gurun, *evit-han hac en he ano*, an Itron-Varia Remengol, pchini zo bet krunaet, devez ar pardon bras, an 30 a viz mae 1838.

Madou spirituel ken precius a zo eun testeni eus a zevotion hon Tad santel ar Pab en andret an Itron-Varia Remengol hac eur merk eus e garante evit ar Vretonet, pere a gavo bepred eun ilis sacr Remengol remed en ho foanio var an douar, pardon d'ho fec'hejou, silvidiguez d'ho ene ha delivrans d'an auñon.

---

## MEDALEN AN ITRON VARIA REMED-OLL.

Medalen an Itron-Varia Remed-oll, *biniguet hac induljançiel* en ilis sacr Remengol, dre urs hon Tad santel ar Pab, a ro d'an den fizianç e Doue, nerz a enep an drouc sjeret, chañç ha bonheur var ar môr, er brezel, en trubuilhou ar bed, consolation ha remed eun oll boaniou hon deus var an douar. Peb kristen a gle, e pad e vue, dongen gant respect en he guereñ medalen precius an Itron-Varia Remed-oll, hac en eur vervel hen lakat var he galon evit mont dirac Doue.

---

Lanhuon, e ti intañvez Ar Goffic, levrer.

